

Res 72

ESKOPTI KEMPER HA LEON

PARREZ LOCRONAN

SANT RONAN

HAG

ANN DROMENY



KEMPER

MOULLET E TY AR. DE KERANGAL

MOULLER ANN ESKOPTI

1887

EUR GOMS ARAOK.

Ho pet sounj, a lavar ar Skritur-Sacr, euz ar re 'zo bet o prezek d'heoc'h koms Doue, hag en eur velet ho büez, kerzit var ho roudou, stard enn ho feiz.

C'hoant em beuz bet dre-ze digass da zounj euz unan anezho, euz sant Ronan, patron Locronan Coat-Nevet.

N'e ket bet tenn nag hir va labour. Ann' Aotrou Thomas, aumônier skolach Kemper, a zo o paouez skriva eul levr' euz ar re gaëra var sant Ronan.

Aotreet ganthan, e klaskan distrei e Brezounek lod euz ann traou dispar em beuz lennet. Ar venanen a zestum var ar bokedou peadra' da ober he mel. Kaout a ran ive fleur ; siouas ! ne c'houzan ket hag e vo mel !

Da vihana, nemet e vo anavezet, karet, pedet muioc'h-mui sant Ronan, ne c'houlennan netra ken digant va c'henvroiz. Ar skrid dister-ma a ziskoezo he humilite, he basianted, he vadelez. D'eomp e vezo lakaat da dalvoud he vertuziou, pep-unan hervez he stad.

Levenez braz a zigouezo neuze 'vit sant Ronan, levenez ive 'vit hor Mam zantel ann Iliz, dre ma vo startoc'h ar feiz enn he vro muia-karet.

Plijet gant sant Ronan benniga al levr hag ann dud a c'hoanteo he lenn !



Église catholique
en Finistère

Document numérisé en 2019

SANT RONAN

HAG ANN DROMENY

I.

BUEZ SANT RONAN

Breiz-Izel e deuz bet cals Sent digant Bro-Zaoz: ann' Irland e deuz roët d'eomp sant Ronan. 'Eunn donezon ker kaer a ve aoualc'h evit ober d'eomp karet ar vro kalounec-ze...

Sant Ronan a zo ganet enn' Irland eta, enn' amzer m'edo sant Patriç o prezek eno ann Aviel, dre-ze var dro fin ar pempet kantved. He dad hag he vamm a ioa kristen. Skoliet gant diskibien kenta sant Patriç, e teuz hep dale da veza desket braz e skiant ar bed, muioc'h c'hoaz e skiant ar Zent. Gant sant Patriç eo en deuz bet ann' eur-vad da veza beleget ha sakret eskop. He vertuz hag he aket a zougaz cals frouez enn he eskopti, mez aliez e teue sounj d'ezhan deuz komzou hor Zalver: « Ann' hini ne zilez ket ar pezh en deuz ne c'hell ket beza va diskibl. » Karet, istimet evel m'a z'oa goulscoude gant he vugale, e tlie kaout diæz kimmiada diouz he vro. Ann henoriou-ze a ree

poan d'ezhan, a vire outhan da zervicha Doue ha Doue hebken, ha setu hen lakaat enn he benn kuitaat eur vro ma z'oa re respetet ennhi, ha mont da glask Doue enn eul leac'h distro benag.

En lavaret em beuz, ia, poaniuz e tlie beza da zant Ronan pellaat diouz he dud. Pobl ebet var an douar ne gar he vro evel ma kar ar Vretouned ho-hini, hag ann Irland ispecial a zo ken' douc d'he bugale!

Sant Patriç a gounter, goude beza prezeget ann Aviel enn' Irland epad tri-bloaz ha tre-gont, a bignaz var gern ar menez huella euz ann enezen, hag eno, sioul, ann dour enn he zaoulagad, ne ehane da zellet ouz ar vro-ze gounezet d'ar feiz, e pede evithi, e save he zourn d'her benniga.

Ann' hini 'ioa bet kelennet gant sant Patriç, hag en devoa he garantez birvidic, sant Ronan gallout a ree enn eur guitaat he gristenien fidel chomm hep rei he vennoz d'ezho?

Brema' var al lestr a ioa ouz he gass etrezek aochou Breiz-Izel, e c'helle lavaret evel sant Kolomkill, he vignoun, o vont d'ann icil: E m' aoun va unan, ô Roue ann env, diouallit va beac'h, ha n'em bezo ket muioc'h a spount eget pa ve c'huec'h mil soudard en dro d'inn.

Hogen, Roue ann env a ziouallaz he veach. Krial en deuz graet ive marteze' vel hor peske-

terien : « Va Doue, sikourit ac'hanon, rag va bag a zo bihan, hag ar mor a zo braz. » E guirionez, dister oa al lestr, hag ouspenn ar goall-amzer, al laëroun-mor a ioa da gaout aoun raz'o. Ronan evelato a zigouezaz hep droug e bro Leon, avanç a reaz varn'hed diou leo enn douarou, hag e chommaz enn eul leac'h distro.

Goude beza savet eul lochennic, e vevaz eno eun nebeud amzer, he speret hag he galon troët varzu Doue hebken. Mes Doue ne zaleaz ket da ziskoez n'e ket eur vuez kuzet a c'houlenne outhan. Rag peorien klanv, o veza deuet dre'n avantur, pe gentoc'h dre bermision ann env, d'he ermitach da glask ann aluzen, ar Zant, paour he-unan, ne roez dezho nag aour nag arc'hant, mes ar pezh en devoa hag a c'helle da rei, da lavaret eo, ar yec'hed, a blijaz cals muioc'h dezho eget holl aour ar bed.

Ann dud keiz-ze en trugarekeaz : mont a rec'hont, yac'h ha dispos, da c'houlenn ann aluzen er c'heariou tro var dro, hag e lavarent, e pep leac'h oant bet pareet dre bedennoù sant Ronan. Ann holl buhan diredet d'he gaout euz a bep korn a Leon, lod evit kinnig dezhan tud seyzet, bouzar, mud, dall, ha klanvourien all, ispicial tud possedet gant ann diaoul, lod evit goulenn cuzul divar afferiou ho c'houstians. Mes o veza darempredet evelse, ne c'helle ket pedi 'vel m'en devoa c'hoant, hag e reaz he

zonj mont kuit, ha klask demeurens e leac'h all.

Ma klaske tec'het, evel m'en devoa græt enn he vro, diouz ar respet a zouge ann holl dezhan, ne c'helle ket mired evelato na vije respetet hag henoret he ermitach dilezet ganthan. Eunn iliz kaer a veler hirio savet var demeurens kenta sant Ronan e Breiz-Izel, ha trô var dro d'ann iliz e z'euz eur gær vihan hanvet Loc-Ronan-ar-Fancq. Arabat credi, diouz ann hano-ze, e ve eul leac'h divalo meurbet. Ann-hini kenta 'zo bet o chomm ebars, a gave d'ezhan beza enn eunn douar all a bromessa, hag he-hunan hen hanvaz Chanaan. Milin Chanan a veler c'hoaz evit digas da zounj euz ann hano coz-ze.

Dilezet eo gant ar Zant al lochenn savet e costez Leon, ha Doue a roaz da entent dezhan en devoa græt mad. Treuzi 'reaz rad Brest, mes erruet var douar Kerne, ne oñie da beleac'h mont. Eunn eal a deuaz neuze da ziskoez d'ezhan ann hent, hag e voe kaset ganthan e koat braz Nevet, a zo e traon eur menez, e kenver baë Douarnenez, teir leo diouz Kemper.

Douar Leon a ioa bet evithan evel eur skeud euz ann douar prometet d'ann Israëlitied. Petra 'dlie neuze sounjal euz al leac'h m'oa bet henc'het etrezek ennhann gant dourn ann eal ? Oh ! dindan ar guéz hüel ar c'hoat a c'holoë ar

menez d'ann amzer-ze, a vel d'ar baë dispar en em zispake 'vel eul lenn ker sklear, ken dirouven dirag he zaoulagad, hep douetans e kave d'ezhan beza c'hoaz enn he vro muia-karet ann Irland. Eur vro gaër en devoa kuiteat, ker kaër-all oa he vro nevez.

Ar güel dudiuz-ze a ree d'he galon tridal, a ree d'he spered contempli gened ann env ha gened Doue : mes ne ree ket evelato d'ezhan dizounjal oa bet tenn he veach, hag oa braz he naoun. Oc'h en em gaout hep logeiz na bevang, en em lakeaz da vont dre ar c'hoat, hag e velaz eunn ty-soul, o chomm ennhan eul labourer. Goulenn a ra digemer, ha digemer laoüen a zo græt d'ezhan gant an den mad-ze. Ann den-man a voüe ken tenerreet gant prezegennou ar Zant, ma ne c'helle mui hen dioueret, hag evel m'en devoa klevet ganthan edo he zounj sevel eunn ermitach er c'hoat, er pedaz da chomm tost d'he dy. Sant Ronan a zentaz outhan, ha ne voüent ket pell ho daou 'vit sevel ann ermitach.

Al labourer mad ne oüie c'hoaz netra euz buez tremenet ann divroad : eunn dervez e c'houlennaz diganthen pïou oa. « Me 'zo gini-die euz ann Irland, eme sant Ronan ; a volon-tez vad em beuz kuiteat va bro, va c'herent, va madou, dre garantez evit Jesus-Krist, enn esper he zervicha guelloc'h, distag ma vezinn diouz traou ar bed. »

O klevet kement-all, al laboureur en devoa brassoc'h karantez hag istim evit ar Zant. Goulenn a reaz ma vije lezet da zont da zelaou he gelennadurez hag he guzulïou, o prometi beza sekret var ar pezh a oüie divar he benn. Sant Ronan a roaz he c'houlenn d'ezhan. Kredi 'ree beza kavet brema ar peoc'h klasket enn aner enn Irland hag e Leon, ha gallout beva enn he c'hiz, pe guelloc'h e giz ann elez, oc'h adori Doue hep ehana. N'en devoa ket zoken d'en em emell euz he vevang, rag he vignoun karantezüz a bourvee d'he holl ezommou.

Ne badaz ket pell ar peoc'h ganthan ; brud santelez ermit Koat-Nevet a ieaz dre ar mæs-you, hag a erruaz buhan beteg Kemper. Ann dud a ioa mall gantho klevet he goms douç evel ar mel, mes ne ket abalamour hebken da glevet he goms e tiredent : d'ar paour-kæz ermitach e veze guelet o tont clanvourien a bep seurt, eun niver braz anezho hag e tistroënt pare.

Enn eur rei d'ar glanvourien ar yec'hed, sant Ronan a ziskoeze madelez he galon, hag he c'halloud e kichen Doue. Muioc'h c'hoaz : evel ma tlie sant Fransez a Asiz hen ober divizatoc'h, e kemere truez ouz ann holl grouadurien e poan, e soulaje anezho ; mestr oa var ann anevaled goüez a ranke senti outhan. Dre zantelez he vuez oa bet gounezet ganthan ar

galloud en devoa ann den kenta er baradoz terrestr', d'ann ampoënt m'edo pur ha neat a bec'hed.

Eunn dervez, o lenn dirag he ermitach, e velaz eur bleiz o tont er c'hoat eunn danvad enn he veg. Sant Ronan her galvaz, hag a gemennaz d'ezhan lezel ann danvad. Ar pezh a reaz dioc'h-tu, ouz hen lakaat dirazhan, hag ar Zant hen rentaz d'he vestr. Ar mestr' ze oa al labourer devot, he vignoun. Memes burzud a reaz meur a vech all. Eaz eo koumprenn pegement oa douget d'ann ermit santel ene pur al labourer. Ne ket he-unan hebken a ioa tenerreet gant douçder he goms ha sküer he vuez anjelic. Sebezet dre ann oberou miraculuz a ree sant Ronan, ne c'helle ket mont kuit diouthan ; mes, harp ouz he dreid, ne golle ger euz ar prezegennou græt d'ar bobl a zirede d'he gaout. Diouz ma veler, ar c'hoant da rêr eur vuez kuzet n'en devoa ket mouget e kalon ann eskop euz ann Irland ar c'hoant da rei da anaut ha da garet Jesus-Krist.

Doue a ioa o vont da lakaat da lugerni vertuz ha santelez ermit Coat-Nevet. Evel ma tiouan ann dreauk etouez ann ed, etouez ar gristenien vad e vez gullet tud fall ive. Evelse ma ree cals ho vprofit euz kenteliou sant Ronan, lod all n'o devoa nemet disprizang evitho. Buez santel ann ermit a gemerent marteze evit eur rebech d'ho dizurziou.

Unan a ioa dreist ann oll enebour d'ar Zant : eur vaouez oa, eur vaouez fallakr, ne gomser anezhi mui nemet gant mez, *Keban* erfin, pa z'eo red he henvel. Dimezet oa d'ann den madeleuz en devoa digemeret ar Zant, hag e c'hourdrouze anezhan, dre ma tremene he amzer o selaou ann ermit, « amzer gollet evit al labour, » emezhi. Hep dale zoken enn he c'hounnar e z'eaz beteg ann ermitach da insulti sant Ronan.

« Tud va zy, va goaz koulz ha va bugale 'zo sorset gan'ehoc'h ; e m'aïnt ato o tont d'ho kaout, ha va zyegez a ia da goll. Ma ne daollet ket evez var ho komzou, kaër ho pezo chouall e kousto d'ehoc'h ! »

Arabab beza souezet, e ve kemeret sant Ronan evit eur sorser. Enn amzer goz oa stank ar zorserien. En eur velet hor Zalver o parez tud possedet gant ann diaoul, ar Pharizianed a lavare : Dre Beelzebud, prinç ann diaoulou, eo e kass kuit ann diaoulou. Euz ann ebestel e veze lavaret ar memes tra. Pa deue al leoned hag ann tigred, eleac'h dispenn ar gristenien, da c'hourvez dirazho, pa vezent espernet gant ann tan evel ann tri-zen yaouank er fournez, ann holl a grie : Eur sorser eo. Ha setu penaoz e vezer tamallet, pa vez klozet ann daoulagad ouz ar miraclou. Hogen sklear oant d'ann holl ar miraclou græt gant sant Ronan. Keban hag

he c'hompagnunez ne zounjent ket ho nac'h ; sant Ronan a ioa eta eur sorser.

Ne respounte ger evelato da Geban. Houman neuze, er meaz anezhi-he-unan o velet ober fañ var he c'homzou, a douaz he goll. En em gemeret a reaz evel-hen : eur verc'h e devoa a bêvar pe bemp bloaz, hag a guzaz enn eur c'houffr, ha goude e tamallaz Ronan da veza he c'haset ganthan. Ronan a c'helle kemeret furm ann holl anevaled : hi he-unan e devoa gueleit anezhan chenchet e bleiz : gant Ronan oa bet lounket al loened nevez-kollet, gant Ronan eta oa bet laëret ha lounket he merc'h.

Piou c'helfe lavaret ne ve ket kredet, hirio zoken, enn hon touez ar memes keleier ? Ann traou sot ha fall a zo bet hag a vezo kredet e pep leac'h hag e pep amzer.

Mont a reaz Keban gant cals merc'hed all euz he seurd beteg ermitach ar Zant. Eno e c'houlennaz he c'hrouadur ; spountuz oa he c'hlevet o iüdal. Ar merc'het a gave d'ezho oa guirion he glac'har, ha n'ho devoüe ket a boan o vont ganthi da Gemper. Setu hi dirag ar Roue Grallon. « Justic a c'houlennan, emezhi : Ronan en deuz lounket va merc'h, ha græt eur sorser euz va goaz. »

Kement a zaëlou a skuille, kement a enerez e devoüe da velet, ma z'oa diaz chomm hep kaout truez outhi. Grallon a gredaz d'ezhi, ha spoun-

tet o clevet eunn torfet ker braz, e reaz klask, sant Ronan. Sant Ronan a deuaz ractal, laouen da c'houzaonv eunn dra benag evit Jesus-Krist.

Ar Roue ne gemeraz ket ar boan da velet hag hen'a ioa didamall pe n'oa ket, re ar gounnar a ioa enn'han. « Daou zoguës em beuz euz ar re voassa, emezhan ; ar re-ze a ziskoezo hag eo direbech an den-ze. Ra vint laosket varn'han : santelez he vuez hen diouallo, ma n'en deuz græt droug ebet. » Ar chass a lamm' var Ronan vit hen dispenn. Ar Zant, o sevel he zourn hag oc'h ober sin ar groaz, a lavaraz : « Doue r'ho tiarbenno ! » Kerhent ann daou gi donveet da ober chalandiz da Ronan.

Grallon a velaz en denvoa kredet re-vuhan, hag e roaz tro da Ronan d'en em zifenn. Hen ober ar reaz, abalamour ma z'oa menek euz gloar Doue. Ma vige bet menek anezhan he-unan hebken, chommet e vije sioul a dra sur, rag, gueleit on deuz, beza anavezet hag enoret a ree aoun d'ezhan. Fallagriez Keban a voüe neuze dizoloet dirag an holl.

Ar Zant ar lavaraz e peleac'h oa bet kuzet he merc'h ganthi, a lavaraz oa maro eno, dre n'e devoa ket bet ear aoualc'h. Ar prinç a gasaz tud da velet hag oa guir kement-se. Guir oa kavet, hag edo Keban o vont da veza devet pe lazet a daoliou-mein, pa n'efe madelez Ronan.

Grallon a lavaraz d'ann den Doue : « Petra ho

peuz c'hoant a rofen d'ehoc'h rag ganehoc'h e ma Doue ? »

— « Ne c'houlennan ken ouzoc'h nemet grass Keban. » Mes n'oa ket aoualc'h evit karantez sant Ronan ; goude m'or bet digoret ar c'houffr, ha kavet ennhan ar verc'hik gourvezet var he c'hostez, maro dre faot he mamm, ann ermit mad en em lakeaz da bedi : a neuze o kemeret ar c'hrouadur dre an dourn, enn' hano Jesus-ec'h ordrenaz, dezhi sevel, hag ar c'hrouadur a zavaz. Grallon hag e dud a goëzaz d'an daoulin da c'houlenn pardoun ouz ar Zant. Ha sant Ronan a zistroaz d'ar c'hoat, hag a chommaz eno oc'h ober pinijen ; eur mean kalet evit penvele, evit guiskamant croc'hen eunn ouner marellet, eur skoultr troet evit gouriz, evit beuvach dour du ar poull, evit bevañ bara poazet dindan al ludu.

Kavet en deuz erfin sant Ronan ar pezh a glaske ken aketuz, ar joa da rên eur vuez kuzet ; mes n'eo nemet evit eunn nebeut amzer. Guelet on deuz pegen humbl oa bet e palez ar Roue Grallon, ha pegen madelezuz e kever Keban, sklear oa d'ann holl ar galloud burzuduz a stage Doue ouz pedennou he zervicher. Evit miret na vije rentet enoriou kaër d'ezhan, oa distroet d'ann ermitac'h a garie kement ; esper en deuz brema beza dispartiet evit mad diouz ar bed, hag a neuze goulscoude tud Kemper ha tud all euz

Kerne a deuaz d'he velet ken aliez, ma voüe e berr-amzer ann hent braz digor etre Kemper hag he ermitach.

Ar Roue he-unan zoken a zirede laouenn da dy ar Zant, ha goude beza bet he vennoz a iee kuit enn eur zounjal er c'henteliou mad en devoa klevet.

Mes re veulet ec'h en em gave ar Zant. Evel m'en devoa dilezet he eskopti enn Irland hag he ermitach e Leon, e tilezaz he lochenn e Coat-Nevet evit techet diouz istim ar Roue, ann dud-gentil hag ar bobl.

Da chomm ez' eaz enn eul leac'h distro euz ann Domnonée, hanvet Hilion, ne m'a ket pell diouz ann andred ma z'eo savet hirio kær Sant-Briec. Pe seurt buez a gunduaz en trede ermitach-ze ? Ha kaout a reaz ennhan ar peoc'h, a c'hoantee kement ? Doue hebken er goar, hag ann elez a veille var al leac'h-ze. E Hilion eo e varvaz ar Zant, leun a vloaveziou hag a veritou, mes ne ket e Hilion e voüe enterret....

Ann tri gondt euz Roazon, Güenned ha Kerne a ioa ho doarou arp eaz ar c'hoat, ma z'oa maro ennhan sant Ronan, hag ho zri a falveze kaout he gorf. Evit gallout en em glevet, e z'echont da gemeret aly digant eunn den coz, din a respet, hag a lavaraz d'ezho : « Klaskit daou ejen goüez, stagit anezho ouz eur c'harr, lakit er c'harr corf ar Zant, hag ho lezit da

vale. Al leac'h ma chommint a vezo al leac'h en deuz choazet ar Zant 'vit beza enterret. » Ann daou ejen kavet ha staget dre ners ouz ar c'harr, ar c'hondt a Roazon, var aly ann den coz, a dosteaz evit sevel ar c'horf divar ann douar; mes, daoust m'oa sicouret gant he zoudarded, ne c'hellaz ket dont a benn. Var he lerc'h ar c'hondt a Wened a glaskaz er sevel, ne c'hellaz ket hen ober ken-nebeud. Ne z'oa mui nemet ar c'hondt a Gerne a ne grede ket touc'h ouz ar c'horf, rag gouliet oa bet he vreac'h dezhan er brezel, hag oa chommet seyzet. Senti 'reaz goulscoude ouz ann den coz, hag evit diskoez e ree mad, ar Zant en em lezaz da veza savet eaz divar ann douar, a roaz ouspenn da vreac'h ar c'hondt he ners, he yec'hed kenta. Ractal ann daou ejen gouez a valéaz ken seder ha didrouz a ma vijent bet o labourat var ar meaz. Goude beza græt cals hent, e ti-gouëchont e Kerne, enn eunn draouyenn, varn'hed mil camed diouz ermitach Ronan, ha setu hi o chomm eno. O velet ann dra-ze ar c'hondt, leun a joa, a roaz e donezon d'ar Zant evit ato ann douar a zo etre ann draouyenn hag ann ermitach, ha kement-all varn'hed mil camed tro var dro. Goude, ann daou ejen a gendalc'haz da vale beteg dor ann ermitach, hag eno e voüe fin d'ho beac'h. Eno e voüe enterret ar Zant, hag al leac'h, m'e ma he vez

c'hoaz hirio, 'zo galvet Penity Sant-Ronan, da lavaret eo, he ermitach pe leac'h he bedenn hag he binijen.

Ouspen tri c'hant vloaz eo chommet corf sant Ronan el leac'h-man, chommet eo, beteg m'eo bet dirollet ann Normanded er vro, er bloaz eiz kant trivac'h ha triugent. Kaset e voüe neuze e Frang, ha pa deuaz ar peoc'h, e voüe distroët da Vreiz.

Diouc'h a leverer pell amzer' zo, tri eskop a ioa e kaonv varlerc'h ar c'horf, lakeet er c'harr evit dont e Kerne. En em gaout a rejont e kichen ar stær a zo e Guer-Nevez e parrez Quemeneven, hag hi gullet Keban discabell oc'h ober coüez da vener, hep respet evit goad Jesus-Christ. Keban dioc'h-tu sevel he golvez, hæ distaga var corn unan euz ann ejenned eunn taol ker pounner ma lammaz spountet ann ejen, ha ma kouezaz he gorn diouthan eur c'hart-leo pelloc'h, el leac'h hanvet hirio Plac-ar-C'horn, etre parrez Locronan ha parrez Plogonnec. « Kee da vreina gant ar c'hass maro, a grie Keban oc'h heul ar c'horf, hivi-ziken ne c'helli ket ober goap ac'hanomp. » Edo c'hoaz digor he ginou, pa deuaz ann douar d'he lounka e kreiz ann tan hag ar maged, el leac'h 'zo galvet *bez Keban*.

Netra n'en devoa gellet eta moug a he c'hounnar, he c'hassony. Kaër en doa bet sant

Ronan rei ar vñez d'he merc'h, ha kaout digant Grallon pardoun evithi-he-unan, aheurtet oa chommet ; maro ar Zant zoken a lez anezhi didruez.

Rag-ze Keban a dremen evit ar vaouez fal-lakr ha divergont dreist ann holl. Pa zaw disput etre diou vaouez, ne c'houzont ket en em insulti goassoc'h eget pa leveront *Keban* ann eil d'eben. Ma ne ehanont ket d'ann hano-ze, ne z'euz rebech ebet goestl d'ho derc'hel.

Eunn hano milliget eo eta, kouls a ma z'eo milliget al leac'h m'eo bet lounket Keban ez-veo. Eur groaz 'zo eno, mes dirag ar groaz-ze ne stoñter ket ar penn. Ar pezh a ziskoez pegen euzuz eo bepret ar zounj euz enebourez sant Ronan.

Perag eo red e ve ar c'hiz pa vez hanvet da lavaret « Keban Loeronan » ? Al leac'h m'eo ganet ne ma ket er barrez-ze, ha tud vad ar gær vihan-ze ne gavont ket diæz tam ebet, ma n'ho deuz ket ann enor da veza euz ar memes bro ganthi.

Ar barrez m'eo ganet ennhi (evit meur a resoun e kuzan he hano) n'e ket bet klevet oc'h en em veuli da veza he bro, ha n'e deuz c'hoaz savet nag imach mæn nag imach coat ebet dezhi.

Keban on deuz gullet a zo kavet abeg ennhi dre ma ree kotiez da vener, hep respet evit

goad Jesus-Krist. Ar c'hiz a ioa eta enn amzer-ze lezel hep ober certen labouriou da vener. Eur c'hiz devot eo. Ne dall ket ar boan goulskoude delc'her d'ar zuperstition a vir ne ve græt netra vraz ebet da vener, hag a gemer an dervez-ze 'vit eunn dervez a voall-chans....

Plaç-ar-C'horn a zo eur plaç benniget. Daouzek station a vez græt epad procession ann Dromeny : ar station gaëra 'zo e Plaç-ar-C'horn. Eno e vez roet ar brezegenn. Eur zounj kristen oa kemeret evit ober meuleudi sant Ronan al leac'h m'eo bet Keban ouz hen insulti eur vech diveza.

Eno e z'euz savet ive da zant Ronan eunn trôn ar braoa, var he c'horre imach ar Zant, guisket enn ermit. A bell e vezo gullet dudiuz, a bell hag a dost ar besketerien enn danjer, al labourerien enn ho varkeier a zavo etrezek ennhan ho daoulagad hag ho c'halon. Bennoz sant Ronan, evel he imach, a vezo bepret ive o para varnezho.

II.

ENOR RENTET DA SANT RONAN

Ann iliz kenta, ma voñe enoret ennhi sant Ronan, eo ann ermitach savet ganthan he-unan. Netra ne voñe chenchet ebars, keit ha ma c'hellaz ar paour-kæz chapell chomm enn

he za. Pa n'oa mui tro d'he derc'hell, oñe savet eur chapell all, ha klasket sevel anezhi braz, kaër, din euz ann hini a ioa c'hoant da enori. Evel ma ree sant Ronan cals miracloù, ar gristenien n'ho devoa nemet muioc'h a joa da gae-raat he chapell ; dre-ze er penn-kenta euz ann unnecved kantved ann eil chapell, savet e plaç ann ermitach tro-var-dro d'ar bez, a zouge dija ann hano a iliz, ha cals douar zoken a ioa stag outhi.

Ann duket a Vreiz a zo bet a viskoaz ho vlijadur pinvidikaat hag orni iliz sant Ronan. Ann iliz 'zo brema a voñe coumançet var dro ar bloaz mil-pevar-c'hant-hanter-kant, hag achuet d'ar fin ar memes kantved. Ar gaëra eo, goude katredal Kemper, euz ann holl ilizou coz a vro Kerne. Kaëroc'h e ve c'hoaz, ma ve gallet he rapari hag he lakaat enn eur stad deread. Perag ne deuffe ket pelerined ann Dromeny da gaout truez outhi, ha da ziskoez ho anaoudegezh vad dre ho aluzennou hag ho offransou ?

Ann dukez Anna a Vreiz 'zo bet o pedi enn iliz ha var bez sant Ronan er bloaz mil-pemp-kant-pemp, ha ganthi eo savet ar bez nevez a veler c'hoaz hirio, dre m'e devoa obtennet digant Doue, dre intercession ar Zant, 'eur verc'h a voñe hanvet Renea, hag a c'houarnaz ive Breiz. Var he lerc'h rouanez Franç ho deuz këndalc'het da veza madoberourien ann iliz.

N'e ket souezuz neuze e ve lakeet imach sant Loïs, patron Rouantelez Franç, e kenver imach sant Ronan e chapell ar Penity.

Eur famill 'zo goulscoude hag he deuz sikouret, muioc'h eget ann duket hag ar rouanez, sevel ha braoat ann iliz : ann' Autrounez Nevet, achu ar voñenn anezho e mil-seiz-kant-trivac'h ha triugent. Arabat credi e ve bet ann noblañc hebken oc'h ober vad da iliz sant Ronan, ar bobl a bez en deuz græt evel-do. Ma n'en devoa ket da rei ato aour hag archant, e roë a volontezh-vad da vihana ann nebeud a c'helle da gaout, hag e labourent a-unan gantho da zével ann iliz din euz ho vatron, din euz ho c'harantezh evithan.

Ar pezh a ra kaout devotion vraz evit iliz Locronan, e Kerne, eo m'e ma eno he vez, e chapell ar Penity, on deuz lavaret dija. Tost da vez sant Ronan e z'euz, arp ouz eur pilier, eur voest e furm eunn tour, hag ennhï eur c'hloc'h. Ar c'hloc'h-ze, hanvet an *Hyr-Glaz*, a gounter a ioa stag oc'h gouzoug enn ejennet goñez a zigasaz corf sant Ronan euz ann trede ermitach d'ann eil. Mes kredabl e serviche, 'vel chloc'h sant Paul, kenta eskop Leon, da c'hervel ar gristenien d'ar bedenn ha d'ann offerenn, hag e verit dre-ze beza respetet.

N'eo ket evelkent ar preçiusa euz ar relegou a virer enn iliz Locronan. Diou gostezenn

d'ar Zant a zo dalc'het e boëstlou arc'hant, hag eunn dourn d'ezhan a veler enn iliz Locournan-Leon. Ma n'en deuz mui Locronan nemet ann diou gostezenn, goude beza bet corf ar Zant nevez maro, eo ma z'eo chommet e katedral Kemper al lodenn vrassa euz ar relegou santel-ze, pa voüent rentet gant ar Franca Vreiz, eur vec'h ann Normandet eat kuit. Siouaz ! ar relegou-ze ne m'aint mui er gatedral, pe da vihana ne c'homm anezho nemet eul lodennik a c'heller da enori gant cals relegou all, e chapell ann *Teir-Veraden c'hoad*.

Eunn dra 'zo c'hoaz da velet enn iliz Locronan : ar gador-brezek. Ne ket ma ve euz ar regosa, graet eo bet er bloaveziou kenta euz ar c'hantved diveza. N'e ket ma ve euz ar regaëra, divalooc'h evithi a vez kavet evelato. Mes abalamour ar panellou anezhi a verk e dek imach round ha koant *Myster sant Ronan*, da lavaret eo, ann historiou brassa euz he vuez. E traon pazennou ar gador e coumanç ann imachou.

1° Sant Ronan, guisket enn eskop, a zo kaset gant ann eal d'ann ermitach.

2° Dre breneest he ermitach sant Ronan a goms ouz al labourer. Keban a gav' anezho. Ne deuz ket ann ear da veza laouenn.

3° Sant Ronan a zo azezet er meaz euz he ermitach. Al labourer karantezuz, daoulinet

enn he gichen. Ar bleiz a zigouez, enn he vek eunn danvad, mes, var urz ar Zant, e lez anezhan. Keban a verk he anaoudegez-vad o tiskoez ann dourn d'ann ermit.

4° Sant Ronan a zo enn he za var treuzou he ermitach. Parea a ra eunn den kamm harpet var diou vranell, hag eur vaotiez seyzet hanter-skoret gant eur goaz.

5° Ar pempet imach a dlefe beza er seizvet plaç, hag a verk ann histor-ma :

Tennet eo Ronan euz ar prisoun, staget ouz eur vezen, ha laosket varnezhan daou zoguës. Hep aoun ebet e ra sin ar groaz var he galon, hag ar chass a dec'h kerkent enn eur iudal spountuz evel ma vije bet ho zroad enn tan. Daou labourer, gantho güest glaz ha bragou braz, a zo oc'h içal ar chass, hag evit ann dra-ze unan anezho a gemer eur forc'h.

6° Toüellet gant gevier Keban, Grallon en devoa kemennet digass sant Ronan da Gempër, hag e veler anezhan henchet gant daou labourer güisket evel ar re a zo enn imach a ziaraoc. Diraz'ho en em avanç var varc'h eunn Aotrou gant porpand ru, rabad fresk ha perruken. Keban a zo varlerc'h, hag evel ma teu d'en em glemm eo bet lazet he merc'h, eo guisket e kaonv hag e toug ar c'hëff melenn.

7° Ama e tle beza plaç ar pempet imach. Ann daulen a ziskoez sant Ronan o ressuscita

merc'h Keban a ioa maro, defotear, er c'houffr m'oa bet kuzet gant he mamm. O tistreñ e buez ar c'hrouadur a zo en em zaoulinet er c'houffr. Keban a laka he biz var he ginou : daoust hag e ve 'vit lavaret d'he merc'h chomm peoc'h ? ha ne ve ket kentoc'h evit diskoez he mez ? Rag peurvuia e lakeer ar biz var ar ginou, pa vezer paket oc'h ober eunn dro fall benag.

8° Enn daulenn genta hebken, sant Ronan a zo guelet guisket enn eskop ; enn taulennou-all, e toug eur viskamant a ermit ; brema, dare da vervel, e kav' a nevez ornamanchou ar garg, en deuz bet c'hoant lakaat koll sounj anezhi, abaoue m'oa digouezet e Breiz-Izel.

Ar groc'h a zo e penn he vele, hag eun eal a ziskenn euz ann env', evit curuni anezhan gant mintr ann eskibien. Eunn dragounn, staget di-var boñez eur jadenn, a zo o ronkellât e traon ar guele, 'vel eur skeudenn euz ann diaoul trec'het.

9° Corf sant Ronan a zigouez e Kerne ; lakeet eo var eur c'harr ; ar Zant a zo ganthan he viskamant a eskop, he benn e kichenn ann ejenned ; ann tri eskop a zoug kânv, e dourn Keban e ma ar c'holvez.

10° Ann daulenn-ma ne zell ket ouz myster sant Ronan. Bez'-e-m'â var doçzer ar gador brezek, hag e velër ennhî sant Ronan o ven-niga eunn Aotrou hag eunn Itroun daoulinet dirazhan.

Daoust hag e ve 'vit digas da zounj euz bizit ann dukez Anna e Locronan ? Marteze zoken int patromiou eunn Aotrou hag eunn Itroun benag euz famill Nevet ? Ne c'heller ket lavaret, rag ne z'euz nag hano nag armoryou ebet.

III.

PROCESSION SANT RONAN

Goude sant Korintin, sant Paul ha sant Guennole, sant Ronan eo ar Zant ar muia anavezet ha karet enn eskopti Kemper ha Leon. Enoret eo abaoue pell amzer, hag ar brassa devoçion evithan en em ziskoez ispicial epad ann *Dromeny*.

Bep c'huoc'h vloaz e vez græt ar procession, hanvet procession *Sant-Ronan*, hag e touger he relegou tro-var-dro d'he venez.

Enn Dromeny vraz, ar procession a ia var douar pemp parrez hag a ra daouzek station ; e pep station eur chapell a zo savet, hag e vez kanet hymou, kanticou, avielou ; e *Plag-ar-C'horn* e roër ar brezegenn. Hent ar procession, miret a bep amzer, a zo ato ar memes-hini. Bez' ez' eo ann hent a ree sant Ronan bep seizvet dervez, diarc'hen ha var yun. Kent-ze ar procession ne vez daleet na gant kañ na gant kleuz na gant foñneyer na gant parc ebet. Netra ne oufe miret ouz ar belerined da

heul hent sant Ronan ; aoun ho defe da goll grasou mad ar Zant. Ne dall ket ar boan eta difenn outho. Eunn dudi eo gueleit ho feiz hag ho devoçion epad ar procession kaër-zé : bis-koaz n'euz bet klevet e vije dizurs, na zoken goall-darvoud ebet.

Ann Dromeny vihan a zigoez bep bloaz, hag a ra ann hent a ree bemdez ar Zant var yun, mes ne ya ket er meaz euz ar barrez.

Procession ann Dromeny vraz a vez d'ann eil sul a viz gouere ; ker brao eo ar procession d'ar zul varlerc'h ; kement a dud a zo ive. Guir eo, cals anezho a zo bet marteze er zizun araoc, mes enn ho zouez e z'euz evelato lod hag a deu evit ar vech kenta da enori sant Ronan.

Erfin, epad ar c'huec'h dervez a dremen etre ann daou zul ha zoken d'ar zuliou, hep heul ar procession, meur-a-hini a ra ann Dromeny enn ho vart-ho-unan.

Lavaret on deuz ne vez dizurs ebet epad ar processionou : poaniuz eo evelkent e ve gueleit supersticionou neuze. Evelse evit obten ann holl mirit ha gounit ann holl induljansou euz ann Dromeny, lod a gav d'ezho e ranker ober hent ar procession hep treï ar penn, ha pa ne ve nemet eur vech hebken ! Penaus e plijfe da Zoue eur c'hiz ken diskiant, ne c'hell nemet teuler dismegans var eur pelerinaj meulet gant ann Iliz ?

Eur c'hiz direzon all a zo c'hoaz. N'e ket roüez ar-re a vez gueleit o vont da zaludi eur mean hanvet *Kazec-Wenn* pe *Kazec-Mean*, e costez ar menez dirag Douarnenez. Perag ?... Ne ma ket ann tro ama d'en lavaret. Sûr eo goulscoude, n'eo ket ar mean a roïo d'ezho ho goulenn, mes bennoz ann env ho devezo enn eur bedi mad sant Ronan.

Ann eil hag ann trede sul a c'houere e z'euz induljans plenier evit kement-hini a dostaïo ouz sakramant ar binijen ha sakramant ann aoter gant ar zantimanchou 'zo red, ha bisitet ganthan iliz Locronan, a bedo ennhi enn intantionou hon Tad Santel ar Pab, hag a reio ann Dromeny vraz.

Gand 'ma vezo pedet enn iliz Locronan ha græt ann Dromeny vraz, e c'heller kovez ha kommunia neuz fors e peleac'h.

N'euz ket ezomm da zigas da zounj eo mad d'ann holl unanet kinnig da zant Ronan ho güella, ho starta pedennou.

Sant Ronan, eskop, a zo bet o labourat gant sant Patric evit silvidigez he vro. Ni a c'houlennno outhan benniga er baradoz pedenn eskibien ann Irland evit ho c'henvroiz enn enkreiz.

Sant Ronan a zo bet he ermitach e kreiz hor c'hoajou. Ni a c'houlennno outhan ar peoc'h a deue da glask e Breiz-Izel.

Sant Ronan en deuz prezeget kalounek coms

Doue. Ni a c'houlennno outhan kaout feiz kreff hon tud-coz.

Sant Ronan madelezuz a ziframme ann danvad digant ar bleiz, hag a resuscite merc'h he enebourez. Ni a c'houlennno outhan difenn ar re-vihan hag ar re-zempl, e riskl da goll büez ann ene.

Sant Ronan en deuz roët cuzulioù fur ha mad d'ar roue Grallon. Ni a c'houlennno outhan evit hor bro mistri a vezo ho zounj kenta lakaat Doue da veza mestr.

Ar bec'herez, kaledet hag aheurtet, a insulte hep ehana sant Ronan, zo bet lounket gant ann douar. Ni a c'houlennno outhan ma vezo goloët a vez ha diskaret enebourien ann Iliz Santel.

Mes he zikour gallouduz a c'houlennimp 'ive 'vit beza diouallet diouz clenvejou ar c'horf. Ar glanvourien on deuz gueleit o tont d'he ermitach, hag o vont kuit pare. Enn eur bignat d'ann env, sant Ronan n'eo ket berreet he c'haloud ; ar fizians a zo ennhan, ann' enoriou rentet dezhan er c'hantvejou tremenet a verk sklear e z'euz bet digouezet miraclou dre he intercession, ha, p'en deuz græt ar burzudou a z'an da lavaret ama varlerc'h, perag ne oufe ket beza ken burzuduz evit mirët hor c'horf hag hon ene ?

Kenta burzud. — Testeni roet gant ann Aotrou Hervé Croissant, cure e parrez Locro-

nan ; an aotrounez Olier Lesné, de Belair, ha Lorans Nicolas, deuz Kermalèzet, noterien, Mathias ar Gall, fabrik iliz sant Ronan, Yvon Guédez, sakrist, ha Catharine Brunot intañvez da Hervé Guédez, bet sakrist ive euz ar memez iliz, holl o chomm e Locronan ; Renan Cadiou, Anna Faou, intañvez da Hervé Kernaléguen, Mari Dervé, intañvez da Yvon Kernaléguen, ha Mao Nicolas, holl o chomm e parrez Plounevez-Porzay. Ar re-ma ho deuz roët testeni dirag ann noterien beza gueleit er bloaz mil-c'huec'h-kant-seitek-ha triugent, a ioa bloaz ann Dromeny vraz, er mare m'edo Saliou fabrik iliz Sant-Ronan, beza gueleit, ar relegou gant ho varru-riou distro seac'h holl d'ann iliz, glibet tam ebet, goude beza bet douget, hervez ar c'hus-tum, e procession, en despet d'ann amzer fall ha d'ar glao, ne baouezaz a boan m'oa diblaset ar procession.

Eil burzud. — Hag ar re, ma z'euz bet menek anezho dija, Cadiou, Faou ha Dervé, a rent testeni beza gueleit, er bloaz mil-c'huec'h-kant-nao ha pevar-ugent, a ioa ive bloaz ann Dromeny-vraz, beza gueleit enn ear, a ziouc'h ar procession, (eder o pignat da venez Plac-ar-c'horn gant ar relegou), flammou tan o vont hag o-tont-a ziouc'h ar procession betek diou vech hag ouspen enn eul leac'h. Ar flammou tan-ze, goude beza nijet dumâ-du-ze eunn ne-

beud amzer a gave dezho pignat a uhel etrezek ann env, hag a ioa ken teo a flammou ar goulou-braz a vez douget peurvuia er processionou.

Trede burzud. — Ha Mao Nicolas a velaz deuz dor he dy, c'huec'h pe seiz vloaz 'zo, eur zulvez prest goude kreiz-deiz, dirag he vugale ne velent ket eveldan, a velaz eur procession kaër ha niveruz, evel ouz ann hini a ra ann dro vraz er menez, o tont deuz al leac'h hanvet Bez-Keban etrezek kær Locronan : etoñez ar c'hroaziou all e c'hanaveze kroaz arc'hand sant Ronan. Goulenn a reaz petra ioa a nevez, hag e voñe respountet dezhan n'oa digouezet procession ebet enn dervez-ze. Ne oñie ket neuze petra' zinifie ann dra-ze.

Pevare burzud. — Ar memez-re ho deuz anza-vet beza klevet gant ar re a ioa hen ho raoc, oa bet gullet o vont er meaz ar relegou, ar c'hroaziou hag ar bannielou, ar chleyer o sini ho unan, hag ar procession oc'h en em renka, hep gallout lavaret nag henvel pe seurt bloaz. Anna Faou goulscoude e deuz lavaret... beza klevet gant he mamm, e devoa klevet gant he zad coz deuz costez he mamm, he hano Nicolas, oa ar bloaz m'edo fabrike parrez Plounevez-Forzay, ha m'edodeuet gant ann armou euz ar barrez-ze, vitkemeret pers er procession. Abalamour d'ar goall-amzer a ree en dervez-ze, oa en em dennet enn

ty a zo dirag dordal braz ann iliz, eleac'h m'eo bet guèchall o chomm Ar Berre, evit beza en disglao. Ha neuze' vouë gullet ar relegou o vont ar meaz ho-unan e procession, gant ar c'hroaziou, ar bannielou, hag ar chleyer a dregerne hep beza sounet : ar pezh a reaz d'ar veleien ha da gals re-all mont da heul.

Ho deuz sinet : Croissant, belec ha curé guèchall, O. Lesné, Lorans Nicolas, Mathias Ar Gall, Yvon Guédez, Loïs ar Grand evit Saliou, Marin Quémener evit Cadiou, Urban Tanguy evit Catharine Brunot, Yan Nihouarn evit Mao Nicolas, Malo Gourlaouen evit Anna Faou, Yan Gourlaouen evit Mari Dervé.

D'an trivac'h a viz guengolo mil-c'huec'h-kant-nao a pevar-ugent.

Sinet : Véron, noter, ha Bricchet, noterien.

ANN DROMENY

Setu ama penaos eo renket ann avielou, ann hymou hag ar pedennou all a zo ar c'hiz da gana abaoe pell amzer e processionou an Dromeny-vraz.

STATIONOU :

E chapell ar Penity Sant-Ronan, e vez kanet..... *Veni, Creator.*
Euz ar chapell d'ar groaz kenta *Iste Confessor.*

Kenta Station er groaz kenta: Aviel.....	<i>In principio erat Verbum</i> (St. Yan, ch. 1).
Goude, hym eur merzer....	<i>Deus, tuorum militum.</i>
Eil Station enn eil groaz: Aviel.....	<i>Erat autem homo et phari-</i> <i>sæus.</i> (St. Yan, ch. 3).
Goude, ann hym.....	<i>Vexilla Regis.</i>
Trede Station e kichen Ro- sancelin : Aviel.....	<i>Quum autem venerit Para-</i> <i>cletus.</i> (St. Yan, ch. 13 et 16).
Goude, hym eur merzer....	<i>Deus, tuorum militum.</i>
Pederved Station ekichen ar feunteun : Aviel.....	<i>Assumit Jesus Petrum et Ja-</i> <i>cobum</i> (St. Vaze, ch. 17).
Goude, ann hym.....	<i>Ave, maris stella.</i>
Pemped Station e croaz Tro- youd : Aviel.....	<i>Si quis diligit me.</i> (St. Yan, ch. 14).
Goude, hym eur merzer....	<i>Deus, tuorum militum.</i>
C'huec'hved Station er groaz Ru : Aviel.....	<i>Accesserunt discipuli ad Je-</i> <i>sum</i> (St. Vaze, ch. 18).
Goude, an hym.....	<i>Tibi, Christe, splendor.</i>
Seizvet Station e croaz Leus- tec : Aviel.....	<i>Hoc est præceptum meum</i> (Sant Yan, ch. 15).
Goude, ann hym.....	<i>Exultet cælum.</i>
Eisvet Station e kichen Sant- Guenole : Aviel.....	<i>Si quis vult post me venire</i> (Sant Vaze, ch. 16).
Goude, hym eur merzer....	<i>Deus, tuorum militum.</i>
Navet Station e kichen Bour- lann : Aviel.....	<i>Et descendens cum illis</i> (Sant Luc, ch. 6).
E traon ar menez an holl a ia da daoulin, hag e vez êntonet ar <i>Miserere meî...</i>	

Decvet Station e Plag-ar- C'horn : Aviel.....	<i>Liber generationis</i> (Sant Vaze ch. 1.)
Goude, e vez ar brezegen. Goude ar brezegen, an hym.	<i>Iste Confessor.</i>
Unnecvet Station e croaz Sant-Thelïau : Aviel.....	<i>Sint lumbi vestri præcincti</i> (Sant Luc, ch. 12).
Goude, ann hym.....	<i>Iste Confessor.</i>
Daouzecvet Station e chapel Sant-Maurice : Aviel.....	<i>Ecce nos reliquimus omnia.</i> (Sant Vaze, ch. 12).
Goude ann hym.....	<i>Iste Confessor.</i>

Ama 'vez achuet cân an Avielou, hag e ken-
dalc'her da vont e procession. Goude ann hym
Iste confessor, e caner *Litanïou ar Zent pe Li-*
taniou ar Verc'hez, hag e kichen Gorrekær e
vez coumançet ar Gousperou, achuet e vezont
e chapell ar Penity, ha d'ar fin e caner ann
hym *Te Deum laudamus*.

Setu aze ar c'hiz coñ, mes abaoe ma z' euz
counje da gaout exposition ar Zakramant evit
ar gouël-ze, goude beza achuet ar Gousperou
er chapell, e z'eer enn iliz vraz, eleac'h ma vez
canet ann *Tantum ergo*, eur bedenn da zant
Ronan, ha roet benediction ar Zakramant.
Goude-ze e caner ann *Te Deum*.

E pep-unan euz ar stationou e vez savet eur
chapel, hag er chapel lakeet eunn imach, da
veza enoret gant ar belerinet en eur ober ar
procession.

Kenta Station.....	Imach sant Eutrope, eskop ha merzer. Ar Zant-ma 'zo evithañ eunn devoñion vraz e Locronan, e deuz c'hoaz unan euz he relegou.
Eil Station.....	Imach ann <i>Ecce Homo</i> , e Locronan e vez lavaret ann <i>Tad Eternel</i> .
Trede Station.....	Sant Jermen a <i>Aoserr</i> , patron Kerlaz.
Pederved Station....	Santez Anna-ar-Palud.
Pemped Station.....	Itroun-Varia a Gelou-Mad.
C'huec'hved Station...	Sant Milliau, merzer, patron Plou-névez-Parzay.
Seizved Station.....	Sant Yan, avieler.
Eizved Station.....	Sant Guënnolé, abad.
Naved Station.....	Sant Ouen, eskop, patron Queme-neven.
Decved Station.....	Sant Ronan.
Unnecvet Station....	Sant Thelieu, patron eur chapell gaër e Plogonnec.
Daouzecvet Station...	Sant Maoris, kenta abad Karnoët.

Plijet gant Sent Breiz hag ann Irland pedi evidomp !

Plijet gant sant Ronan hag ar Zent enoret enn Dromeny pedi evidomp !

PEDENN DA ZANT RONAN

TON : *D'hor mamm Santez Anna.*

Diskan :

Sant Ronan, hor patron,
Ni ho ped a galon !
Mirit, enn han' Doue,
Hor c'horf hag hon ene !

1.

Kaër eo diouz ar mintin
Ar gliz er parkeier :
Kaër ho pennoz divin
Varnomp, e peb amzer.

2.

Ar pinvidic, ar paour
Ama 'zo daoulinet :
Eleac'h danvez hag aour
D'ezho roït eürused !

3.

Roït ive, 'vel guechall
Yec'hed d'ar glanyourien !
Deuit ato d'hon diouall
Ouz ar vreach, ar voçen !

4.

Sellit er mor diroll
Hor c'herent enn danger :
E m'aïnt o vont da goll :
Trüez ! ô Tad tener !

5.

Bleizi 'zo bet guele
Tro var dro d'ho lochenn :
Bleizi 'zo kounnaret
Ouzomp, ouz hor c'hredenn.

Quimper, 2 juillet 1887.

PERMIS D'IMPRIMER :

A. SERRÉ,
Pro Vicaire Capitulaire.

6.

Ann anevaled goüez
Pell diouzoc'h a dec'he :
Hag ar bed didruez
Treach 've d'ho pugale ?

7.

Nan, nan, rag ho kalon
Morse n'eo bet sklaset ;
Nan, galloud hor patron
Morse ne vo berreet.

8.

Evit gloar oc'h hano
Direit d'hor sicour !
Kasit pell diouz ho pro,
Kasit ann enebour !

9.

Ma n'hor selaouit ket,
Ni ielo d'an daoulin,
'Vit en em glemm bepret
Dirag sant Korintin.

10.

C'hoant hon deuz da veva
E skeud ho' tiouaskell :
Chom hep ho servicha,
Kentoc'h mil guech mervell !

11.

Holl epad hor büe,
Ni ho pedo daoulin,
Da c'hedal mont d'ann Êe,
D'ho meuli da viken.

Kemper, moulet e ti DE KERANGAL, mouler ann Eskopti.